



## KINNIG LABOUR

-

### Kontour·ez

## Skolaj Diwan Bro Dreger ha Lise Diwan Karaez

Ur rouedad skolioù kevredigezhel, laik digoust ha digor d'an holl eo Diwan. Hiziv ez eo an hentenn gelenn nemeti hag a ginnig ar c'helenn brezhoneg dre soubidigezh. Krouet eo bet Diwan 43 vloaz zo hag ez eus bremañ 48 skol, 6 skolaj ha daou lise er 5 departamant Breizh.

Emaomp o klask ur g·c'hontour·ez e karg eus merañ kontoù Skolaj Diwan Bro Dreger ha Lise Diwan Karaez.

Dindan kiriegezh renerezhioù ar skolaj hag al lise e labouroc'h ivez gant teñzorerien an AEPoù. Evit kas ho kefridi da benn e voc'h skoazellet gant sekretourva an div skol hag e voc'h ivez e darempred gant an dud a vicher er gevredigezh. Bez ho po da vont en daou lec'h ha rannet e vo hoc'h amzer labour etre an daou.

### Ho labour a vo

- Ober war dro ar gontouriezh hollek (ar skriturioù betek ar bilañs ha kontoù ar bloaz)
- Sevel fakturenoù familhoù ha pratikoù,
- Enkefiañ, heuliañ ar paeamantoù, gwiriekat ar c'hontoù-bank
- Merañ sokial (nebeutoc'h eget 10 implijad) : kevrat labour, fichennoù gopr, diskleradennoù sokial

### Doare den klasket

Ur stummadur kontoù a zo ganeoc'h (BTS, DUT, Aotreegezh pe muioc'h) hag ur skiant prenet 3 pe 5 bloaz en un embregerezh pe en ur gevredigezh.

Ma n'ho pefe ket a-walc'h a skiant prenet war al lodenn sokial e vo tu deoc'h bezañ sikouret gant an dud a vicher er gevredigezh met ret eo deoc'h koulskoude kaout un anaoudegezh diazez war an danvez.

Yezh labour an daou lec'h eo ar brezhoneg. Erbedet mat eo eta d'an den a gemero ar post gouzout brezhoneg dre skrid ha dre gomz.

Un den aketus oc'h ha plijout a ra deoc'h selaou an dud hag eskemm ganto. Barregezhioù zo ganeoc'h evit kregiñ gant ur post en ul lec'h nevez o vezañ buan en ho aes.

### Titouroù-all

CDI leun amzer bloazieket

Devezh kregiñ : an abretañ ar gwellañ

Gopr : Kael « Rummad B » an deskadurezh stad

Lec'h labour : Al lec'h a c'hello bezañ dibabet gant ma vo skiant prenet ganeoc'h ha goude bezañ priziet hoc'h emrenerezh ganeomp.

Ma z'och dedennet gant ar post, trugarez da gas ho CV ha lizher emginnig da [tuta@diwan.bzh](mailto:tuta@diwan.bzh).